



## **Taolenn embriziañ war addigeriñ ar skolioù adalek an 12 a viz Mae 2020**

### ***Grille d'auto-évaluation sur la réouverture des écoles à partir du 12 mai 2020***

Savet eo bet an daolenn-se gant Diwan evit sikour ac'hanoc'h da briziañ stad an traoù en ho skol, deoc'h da c'houzout ma c'helloc'h digeriñ ho skol gant un niver bevennet a vugale diouzh ment an ti. Tennet eo bet dezverkoù an daolenn-se diouzh raktres Protokol yec'hedel addigeriñ ar skolioù mamm ha kentañ derez savet gant an Deskadurezh Stad.

D'ar rener.ez ha d'ar b.prezidant.ez da genlabourat evit leuniañ an daolenn dezho da gaout elfennoù pleustrek ret da zivizout war an addigeriñ. Evidoc'h eo bet graet an daolenn-se, laouen e vimp memes tra da gaout anezhañ diganeoc'h, d'ar rouedad da gaout ur sell resis hag hollek.

*Ce tableau, préparé par Diwan, est fait pour vous aider à apprécier la situation de votre école pour pouvoir ouvrir avec un effectif restreint selon vos surfaces disponibles. Les critères proposés sont précis et issus du projet de Protocole sanitaire de réouverture des écoles maternelles et élémentaires de l'Education nationale.*

*Le·a directeur·rice et le·la président·e d'école travaillent ensemble pour remplir le tableau et disposer ainsi des éléments nécessaires à la décision de réouverture.*

*Ce document a été élaboré pour vous aider. Toutefois, nous vous invitons à nous le retourner, afin que Diwan puisse avoir une vision globale de la situation.*

<b>Dezverk critère</b>	<b>Tizhet pe get Atteint ou non</b>	<b>Diskoulmoù zo Solution possible</b>
Ment ar salioù (3,3 m2 dre skoliad.ez pe 50 m2 evit 15 skoliad, taolioù 1 metrad etrezo) <i>Surfaces disponibles (3,3 m2 par élève ou 50 m2 pour 15 élèves et tables à un mètre de distance)</i>		
Ment ar sal kousket (Marteze e c'hell ar c'houkkaez lesket d'ar re vihanañ nemetken da skouer) <i>Surface suffisante dans le local de sieste (éventuellement en réservant la sieste aux plus jeunes enfants)</i>		
Kempen ha divikrobiñ div wech an deiz (o lakaat an implijidi kentoc'h war an task-se eget war an tro-skol) <i>Le nettoyage et la désinfection 2 fois par jour (principalement en redéployant les heures des ING quitte à réduire les heures d'accueil en garderie)</i>		
2 vaskl an deiz (rummad 1, da deurel pe e danvez) evit tud deuet ar skol (degaset gant an implijer pe ar strollegezh lec'hel p'eo posupl) <i>2 masques par jour (catégorie 1, jetable ou réutilisable) mis à disposition des adultes présents (par l'employeur, via collectivité quand c'est possible)</i>		
Trawalc'h a lec'hioù dour en ti evit gwalc'hiñ an daouarn <i>Nombre de points d'eau suffisant pour lavage des mains</i>		
Niver a vugale da zegemer da c'houzout en a-raok <i>Avoir une idée précise du nombre d'enfant à accueillir</i>		
Kaout dourenn divikrobiñ a-walc'h (ma ne vez ket a-walc'h a lec'hioù dour). D'ar skolioù da embann m'o deus peotramant goulenn kaout <i>Solution hydroalcoolique à disposition (si nombre de points d'eaux insuffisants). A l'école de préciser si elle a du stock ou si elle souhaite en acquérir.</i>		
Diwall ma vo a-walc'h a dud deuet en dro d'ar vugale. <i>Être vigilant sur le taux d'encadrement des enfants.</i>		

Evezhiadennoù : Remarques :	
--------------------------------	--